

KIS-510 – Ar c'hemmadurioù goude ar rakgerioù niver

(GP da GE – 04 10 96)

A-zivout ar rakgerioù niver ¹ :

ue- + gwanadur, sl. : *ugent*.

tre- + gwanadur, sl. : *Treger, tregont*.

per- + gwanadur — < **petru-*, sl. : *Petru-corii* > **Perger*, *pergont* ;
hBr. *petr-* [peDr].

pem-+ \emptyset (= hep kemmadur) kent eget **pemp-**, a vije “reishoc'h” moarvat,
diwar skouer *pemont* evit diforc'hañ aesoc'h diouzh “5”.

c'hwe- + \emptyset ivez daoust da *c'hwegont*.

sei- + \emptyset .

ei- + \emptyset .

nao- + gwanadur ; an **-o-** en abeg da *naogont*, ha “reizh” vije amañ ar
c'hwezhañ avat, hogen, da'm soñj, ne ve ket fur liesaat ar “reolennoù” gramadeg. Da
skouer, ne gav ket din en hon bije ur skouer eus ar c'hwezhañ goude **dek** en dije eñ
goulennet diwar e orin, sl. Kb. *deng mlynedd*, bet skornet a-barzh e triadoù zo e
kembraeg ivez. Ma heuilhfemp emgefreak an deverañ neuzvouezhiadoniel (saveleñoù
ar “sonhanez” !) e rankfemp c'hoazh c'hwezhañ goude **sei(zh)-** ha gwanaat war-lerc'h
ei(zh)-... Arabat monet re bell.

¹ Sl. KIS-497, La-10, pp. 374-375.